


ESKOPTI KEMPER ha LEON



KENVREURIEZ
ar
BREZONEG

18
—

K A I E R I 8

- D'ol lonnerien	32
- Sul kenta ar bloaz A, Badiziant an A6. Krist	33
- Eil Sul Ordinal A	36
- Trede Sul Ordinal A	39
- Pevare Sul Ordinal A	42
- Pemped Sul Ordinal A	45
- C'Hwehved Sul Ordinal A	48
- On Tad hag a zo en Neñv	53

- Overennou Gouel Nedeleg	kaier II-p.12-27
- Gouel Itron Varia, Mamm da Zoue	kaier I2-p.39-41
- Eil Sul goude Nedeleg	kaier I2-p.42-45
- Gouel ar Rouaned(Epifani)	kaier I2-p.50-53

- Troidigozioù aotrect da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'an IO a viz kerzu 1971

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

Ar re n'o deus ket paet hoaz ho homanant evid kaierou
KENVREURIEZ AR BREZONEG 1971-1972 a zo pedet d'henn ober, ar
henta ar gwella. Kas an arhant: 15 lur d'an :

Poan 'zo bet, goude mon' meur a hini dorn-ha-dorn, o klask kenderhel gand labour an Aotrou P.Y. Nedeleg. Red e oa koulskoude, dre vignoniaj evid or henvreue, ha dre an ezomm hag ar goulenn o vond atao war gresk.

Dre hras Doue, om deuet a-benn da gemer penn an hent, hag an niverenn-mañ, n'om ket nehet, a roio fiziañs d'an oll. N'eo ket lavared avad, e plijfe deom penn-da-benn ar haierou diweza embannet, nann, or gér-stur a vezo: bepred war well!, war an danvez ha war an embannadur.

Petra glaskom nemed lakaad etre daouarn ar veleien hag an dud fidel ar pezh o-deus ezomm evid ma vo esoh rei muich-mui a blas d'ar brezoneg en ilizou. C'hwil a hell or zikour en eur lavared deom petra garfeha ve embannet. (skriva d'an Ao. Elard). N'eo ket e vefem nehet, er mare-mañ; ur bern traoù on-eus da embann ha paket om eun tammig berr ...

Karoud a rafem e vefe kaerroh or haierou, paper ha moulladur, med a-bred e vezim skoillet gant ar mizou. Goulenn a reom diganeoh beza broket pa gasoh priz ho koumanant ha klask deom koumananterien nevez. Stank eo c'hoaz ar veleien hag an dud fidel troet gand ar brezoneg ha n'o-deus ket klevet ano biskoaz euz "KAIEROU KENVREURIEZ AR BREZONEG". Ahanta! Deoh ober brud!

War stankaad ez a an overennou e brezoneg, hir e vefe roll ar parrezioù o-deus overennou e brezoneg penn-da-benn, diou ar miz evel e Brest, unan ar miz evel e Kemper, meur a wech war ar bloaz, evel e Lesneven, er Folgoed, e Plougerne, e Baye... A hend-all, e houzom ez eus bet anez, e Plouyé (e chapel Sant Salaun hag en iliz-parrez), e Kerlouan, Plougoulm, Plouenan, Treguenneg, Landevenneg, en ospital Lesneven, gand pardon Sant Vaodez, Plouzeniel, e Kernouez (pardon Itron Varia ar Sklerder), Plouarzel, Coat-Méal, Gwiseny (Itron Varia Brendaouez) hag e meur a leh all...

Awechou n'eus nemed eun overenn e brezoneg, dre zigouez, evid ar radio, an T.V., eur gouel bennag, med an dra-se a zigor hent... Beb tro, an dud a zigouez beza kontant, deski a reont respont ha kana, c'hoant o-devez da gaoud endro ha pa ne vefe nemed eur wech dre vare. An overenn lavaret, evid ar wech kenta, e brezoneg, e Lourd, ekerz ar pelerinaj diweza a zeuas eur bern tud da gemer perz enni hag a zigoras o daoulagad da veur a hini. Petra vefe bet an overenn-ze, ma vefe bet an oll boazet da gaoud overenn e brezoneg en o farrezioù! Nann, ne gredom ket e vefem re ziwezad. Bez ez eus c'hoaz kristenien stag ouz yez o bugaleaj ha tra souezuz, ar re yaouank eo a vezo hebdale an troeta gand ar brezoneg ha lorc'ho erno gand o yez.

Bez 'ez eus ivez parrezioù e-leh ma 'z a ar brezoneg el lidèr, evel dre zil; ur hantig hirio, eul lennadenn er zul warlerh, ar zarmon greet hanter-hanter e brezoneg hag e galleg da unan pe unan eus an overennou. Ne vez den feuket hag ar brezoneg a hounid tachenn. Arabad eo ober fae war an disterra kammed a vez greet war araog.

Goulenn a zo; arabad eo e vefem atao o vond a-benn d'an avel. Ar re o-defe c'hoant gouzoud petra eo eun overenn e brezoneg n'o-deus nemed mond d'ar Folgoad, d'ar pardon pe d'ar pemp sul, pe da Plougerne, pe da Lesneven. N'eo ket souezuz e teufe leun a dud euz a bell.

Kenvreuriezh ar Brezoneg

kerzu 1971

GOUEL BADIZIANT OR ZALVER

LENNADENN GENTA.- Servicher an Aotrou Doue eo ar Zalver,
sakret evid embann ar zilvidigez d'an oll dud.

Pennad euz Levr ar Profed Izaiaz (42/ I-4,6-7)

1. Setu va servicher, a roan harp dezañ,
an den dibabet ganin, a gavan va dudi ennañ
Laket am eus va spered da ziskenn warnañ,
d'ar poblou payan eñ a roio da anaoud ar wir relijion.
2. Ne hopo ket, ne ravo ket uhel e vouez,
ne vo ket klevet war ar blasenn.
3. Ne 'flastro ket eur gorzenn dorret,
ne lazo ket ar goulou dare da vervel
(pe: ne vouez ket eur houlaouenn eet bian)
gand lealded, e tisklerio ar wir relijion.
4. Ne 'fallaio ket, ne blego ket,
kén n'e-no diazezet ar wir relijion war an douar,
mall gand poblou an inizi pella deski gantañ al lezenn.
6. Me, an Aotrou Doue, am eus galvet ahanout
evid seveni va menozioù a zilvidigez,
kroget am eus en da zorn, da ziwallet am eus,
ha da laket evid beza emgleo va fobl
ha slerijenn ar broadou payan,
7. evid digeri o daoulagad d'ar re zall, dijadenna ar brizonerien
ha tenna euz an toull-bah ar re a vev en deñvalijenn.

SALM 28

(I-2, 3ac-4, 3b-9c-10)

An Aotrou Doue a skuill e vennoz war e fobl,
hag e ro dezi ar peoh.

1. Dougit d'an Aotrou Doue, c'hwi bugale Doue,
dougit d'an Aotrou (Doue) gloar hag enor.
2. Dougit d'an Aotrou pep gloar dleet d'e ano,
stouit dirag an Aotrou, en ho kaerra dillad.
3. Mouez an Aotrou a-uz d'ar mor: emañ an Aotrou a-uz d'an doureier braz.
4. Mouez an Aotrou a darz gand nerz, mouez an Aotrou e-kreiz ar splannder.

- 3b. An Doue uhel-meurbed a lak ar gurun da drouzal;
 8c. En e di santel emañ an oll o lavared: Gloar !
 IO. A-zioh an dour-beuz edo an Aotrou azezet war e gador;
 emañ an Aotrou Doue war e gador,roue da viken .

EIL LENNADENN.- An abostol Sant Per a zo e ti eun ofiser roman,e-neus e halvet
 da zond.Displega a ra penaoz eo bet boulhet labrurar zilvidigez
 dre ar vadiziant roet gand Yann Vadezour

Pennad euz Levr Oberou an Ebestel (IO/34-38)

34. E ti an ofiser Korneli,Per a zo kroget da gomz:
 "E gwirionez,emezañ,kompren a ran
 ne ra ket Doue gwelloc'h stad euz tud 'zo;
 35. ar kontrol,e kement gouenn pe bobl a zo,
 an dud a zouj anezañ hag a zo reiz o buez ,a blij dezañ.
 36. Digaset e-neus e gomz da vugale Israel,gand kelou mad ar peoh
 dre Jezuz Krist:hemañ 'zo Aotrou war an oll dud.
 37. Gouzoud a rit,c'hwil,ar pezh 'zo bet c'hoarvezet e Bro-Judea a-bez;
 boulhet eo bet an traou e Bro-Halilea,
 war-lerh ar vadiziant embannet gand Yann.
 38. Jezuz a Nazared e-neus Doue sakret anezañ,
 o rei dezañ ar Spered Santel hag e halloud.
 Tremenet eo e peb leh en eur ober vad
 hag en eur barez kement hini a oa gwasket gand an diaoul.
 Rak Doue a oa gantañ.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Euz an Neñvou digor eo bet klevet mouez an Tad
 o tiskenn: Setu va Mab,va muia karet;selaouit
 outañ ! Alleluia !

AVIEL

Pennad euz Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze (3/ I3-I7)

- I3. Neuze e teu Jezuz euz Bro-Halilea beteg ar Jourdan da gaoud Yann
 evid beza badezet gantañ.
 I4. Yann avad,ne fell ket dezañ e vadezi:
 - Me eo,emezañ,a dlefe beza badezet ganeoh,

ha c'hwi a deu davedon !

I5. Jezuz a respont dezañ:

- Gra egiz ma lavaran dit,

rak evelse eo on-eus da gas peb justis da benn.

Neuze Yann a bleg d'e venoz.

I6. Kerkent ha badezet, e teu Jezuz er meaz euz an dour

hag an neñvou a zigor.

Gweled a ra Spered Doue o tiskenn evel eur goulm

hag o chom warnañ.

I7. Eur vouez deuet euz an neñv a lavar:

- Hemañ eo va Mab muia karet, a zo va lavenez.

PEDENNOU GOUEL BADIZIANT OR ZALVER

PEDENN AN DIGOR.

I// Doue oll-halloudeg ha peurbadel, epad ma tiskenne ar Spered Santel war Or Zalver Jezuz krist, badezet er ster Jordan, ho peus-c'hwi diskleriet e oa eñ ho Mab karet; +++ ni ho ped, evid an dud ho peus kemeret da vugale, pa 'z int bet ganet a nevez dre an dour hag ar Spered Santel, ma talhint, heb koeza morse, da heulia ho polontez 'hed o buez. Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, + Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan a oll viskoaz da virviken. AMEN!

2/ pe

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo deut ho Mab karet

d'en em ziskouez d'andud gand eur horv evel on hini,

grit ma vim renevezet en on diabarz

gand an hini on eus anavezet heñvel ouzom en diavêz:

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, + Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU.

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, kemer ar provou a zigasom deoh,

da geñver an deiz m'ho peus diskouezet deom Jezuz, evel ho Mab

karet, + grit ma teuio provadenn ho tud fidel da veza sakrifikis

ar memez Jezuz, a zo fellet gantañ, en e drugarez, gwalhi pehejou

ar bed. Eñ on Doue ganeoh ha gand ar Spered Glan a oll viskoaz..

GOUDE KOMUNIA: Maget gand ar zakramant santel, e pedom c'hoaz ho delez, Ao. Doue: + en eur selaou gand feiz ho Mab Unganet, grit ma vim

LENNADENN GENTA.- Gwir servicher da Zoue,eur sklerijenn evid an oll boblou,
setu petra vo Jezuz,hervez Izaiaz.Digas a raio ar zilvidigez
d'an oll dud.

Lennadenn euz Levr ar Profed Isaiaz. (49/ 3,5,6)

3. An Aotrou Doue e-neus lavaret din:

- Wa servicher out-te,Israel,ennot e lakin va gloar.

5. Ha bremañ,Doue en-eus komzet.

Gantañ oun bet furmet,kerkent ha m'oa ahanon,

da zistrei Jakob davetañ ha dastum dezañ Israel

6. Lavaret e-neus:

- N'eo ket awalh dit beza va servicher,

evid adsevel meuriadou Jakob

ha digas en ar re a jom euz Israel.

Ober a rin ahanot sklerijenn an oll boblou,

ma z'ay va zilvidigez beteg ar penn pella euz an dour.

SALM 39

(7-8a;8b-9,10,11)

Setu me o tond,Aotrou Doue,
evid ober ho polontez.

7. Ne blije ket deoh na sakrifikis,na provadenn,

met va diskouarn ho peus digoret;

ne houlenneh na sakrifikis peurlosket,na sakrifikis evid ar pehed.

8a Neuze am eus lavaret:" Setu me o tond. "

8b Skrivet eo el levr diwar va fenn:

9. ober ho polontez,va Doue,setu va dudi;

ho Lezenn 'zo e goueled va halon.

10. Ar helou mad euz ho perz a embannin e bodadeg vraz an dud,

ne zalhin ket kloz va muzellou:Aotrou Doue,her gouzoud a rit.

11. Ne zalhin ket ho madelez kuzet em halon,

ho fealded hag ho zilvidigez a embannin;

nann,ne guzan nag ho madelez,nag ho fealded dirag ar vodadeg vraz.

EIL LENNADENN.- Karg puezusa an abostol,hervez Sant Paol,eo dreist peb tra
rei testeni euz Or Zalver Jezuz,bepred.Evid ar hristen eo
heñvel.

Lennadenn euz lizer an Abostol Sant Paol da gristenien Korint. (I/I-3)

1. Paol, galvet da veza abostol Jezuz Krist,
dre volonteze Doue, ha Sostèn, or breur,
2. da Iliz Doue a zo e Korint,
d'ar re a zo bet santeleet en Aotrou Krist,
hag e-neus galvet da veza sent,
evel d'ar re oll e peleh bennag e vefent,
a bed ano Jezuz-Krist, an Aotrou,
o Aotrou dezo hag on hini-decm-ni:
3. Deoh gras ha peoh, aberz Doue, hon Tad,
hag aberz Jezuz-Krist, on Aotrou.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Ar Hrist a zo en em hraet den,
en on touez en-eus graet e zemeurañs.
Dreizan e teuint da veza mibien da Zoue
ar re oll e zigemer. Alleluia !

AVIEL

Pennad euz Aviel Jezuz Krist, hervez Sant Yann (I / 29-34)

29. En deiz warlerh, Yann a wel Jezuz o tond davetañ hag a lavar:
- Setu Oan Doue, an hini a zilamm pehed ar bed !
30. Hemañ eo an hini am eus lavaret diwar e benn:
- Eun den a deu war va lerh, hag a dremen em raog,
rag em raog e oa anezañ.
31. Ha me, ne anavezen ket anezañ;
met evid ma vefe roet da Israel e anaoud,
eo ez 'oun deuet da vadezi en dour.
32. Yann a ziskleir:
- Gwelet em eus ar Spered, evel eur goulm
o tiskenn euz an neñv hag o chomm warnañ.
33. Ha ne anavezen ket anezañ;
med an hini e -noa kaset ahanon da vadezi en dour, en-oa lavaret din:
- An hini a weli ar Spered o tiskenn hag o chomm warnañ,
henneze eo a vadez er Spered Santel.
34. Ya, gwelet em eus ha diskleria a ran eo eñ Mab Doue.

PEDENNOU AN EILVET SUL ORDINAL.PEDENN AN DIGOR.

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
 mestr war draou an neñv hag an douar,
 selaouit gand madelez pedennou ho pobl fidel, +++
 ha roit d'om amzer an donezon euz ho peoh.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, +
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU.

Roit deom ar hras, Aotrou Doue,
 da gemer perz en overenn-mañ,
 gand gwir feiz ha karantez; +++
 rag beb gwech ma vez lidet ar zomj euz Sakrifis ho Mab,
 e vez adnevezet labour burzuduz or silvidigez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Skuillit ennom, Aotrou Doue, spered ho karantez:
 goude beza or maget agnd ar memez bara euz an Neñv, +++
 grit deom beza unanet kenetrezom er memez karantez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

LENNADENN GENTA.- Sklerijenn Doue a zigas ar frankiz. Ha goude ma voe wasket ha brevet e chom gant ar hristen e frankiz.

Lennadenn euz Levr Izaiaz

8/23b , 9/3

8/23. N'eus mui a deñvalijenn evid an douar bet beuzet en anken.

Gwechall e-neus taolet dismegañs war bro Zabulon ha bro Nephtali,
hag en emzer da zond, e holoio a hloar an hent a gas d'ar mor,
en tu all d'ar Jordan, douarou ar bayaned.

9/3 Hag ar yeo a boueze warnañ,
ar wialenn a skoe war e skoaz,

baz an hini e walgase,

o brevet ho peus evel da zeiz Madian.

SALM 26

I,4,I3-I4

Sklerijenn ha silvidigez
eo an Aotrou Doue 'vidom.

I. Va sklerijenn ha va silvidigez eo an Aotrou;
rag euz piou am-mo aon ?

Moger-divenn va buez eo an Aotrou; dirag piou e krenin ?

4. Eun dra am euschoant bras da gaoud,
a houlenann digand Doue,
Mond da jomm e ti an Aotrou Doue,
epad va oll amzer.

Eun drugar vo din peoh an Aotrou Doue,
hag eun dudi gweled e zantual.

I3. Sur on e welin madelez an Aotrou Doue, e bro ar re veo !

I4. Gortoz an Aotrou gand fiziañs, bez dispont ha kaloneg,
gortoz an Aotrou Doue.

EIL LENNADENN.- Eur mestr on-eus hag unan hebken, ar Hrist.
Arabad neuze e vefe dizunvaniez en on touez.

Lennadenn euz lizer an abostol Sant Paol da gristenien Korint. (I/I0-I3, I7-)

I0. Hoh aspedi a ran, va breudeur, en ano or Zalver Jezuz-krist;
en em glevit mad kenetrezh,
diwallit na ve disrann en ho touez,
bezit unanet stard a spered hag a galon.

- II. Klevet am eus diwar ho penn, aberz tud Chloe, ez eus dizunvaniez etrezoh.
- I2. C'hoant am eus lavared:
- Unan pe unan ahanoh a lavar: me a zo evid Paol, me a zo evid Apollos, me evid Kefas, ha me evid ar Hrist.
- I3. Daoust ha disrann a zo er Hrist ?
- Daoust ha Paol eo a zo bet staget ouz ar Groaz ?
- Daoust hag en ano Paol eo ez 'oh bet badezet ?
- I7. N'eo ket evid badezi eo oun bet kaset gand ar Hrist,
- med evid prezeg an aviel ha n'eo ket gand komzou livet brao,
- en aon na vefe kaset da netra kroaz ar Hrist.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Jezuz a embanne kelou mad e Rouantelez,

hag a zigase d'e bobl ar pare euz an oll gleñvejou.

Alleluia !

AVIEL

Pennad euz an Aviel Santel hervez Sant Vaze. (4/I2- 23)

- I2. Pa glev Jezuz e oa bet lakeet Yann er prizon e tistro da vro Halilea.
- I3. Dilezel a ra Nazared evid dond da jomm da Gafarnaoum,
- war ribl ar mor, war arzou Zabulon ha Neftali.
- I4. Ev'ise e teu da wir komzou ar profed Isaiaz:
- I5. - Douar Zabulon ha douar Neftali,
- an hent a gas d'ar mor, en tu all d'ar Jourdan, Galilo ar bayaned ,
- I6. o deus gwelet eur sklerijenn lugernuz;
- war ar re a veve en noz tenval ar maro,
- eur sklerijenn a zo paret.
- I7. Jezuz a stag da brezeh evelhen:
- Grit pinijenn, rag tost ema rouantelez an neñv.
- I8. O tremen hed mor Galile, e wel daou vreur:
- Simon lezanvet Per, hag Andre, e vreur,
- o taoler o rouejou er mor, rak pesketerien e oant.
- I9. Jezuz a lavar dezo:
- Deuit d'am heul ha me a raio ahanoh pesketerien tud.
20. Raktal e tilezont o rouejou hag ez 'eont d'e heul.
21. Pelloh, e wel daou vreur all, Jakez, mab Zebede, ha Yann e vreur,
- en o bag, gand Zebede, o zad, o kempenn o rouejou.
22. Gelfer a ra anezo, ha kerkent e tilezont o bag hag o rouejou

23. Tremen a ra dre Vro-Halilea, en ur brezeg er sinagogou,
 oh embann kelou mad ar rouantelez
 hag o rei ar pare d'ar re a zo taget gand ar hlenved
 pe ar sempladurez.

PEDENNOU AN TREDE SUL ORDINAL A

PEDENN AN DIGOR

DOUE oll-halloudeg ha peurbadel,
 ni ho ped da veza o rén on oberou
 hervez ho polontez madelezuz,
 evid ma hellim beza karget a oberou mat
 en amo ho Mab karet,
 Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glam,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOU.

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, digemer gand madelez ar provou-mañ; +
 en eur skuill ho santelez enno bremaig evid o zakri,
 grit ma vezint talvouduz evid or zilvidigez.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Ho pedi a reom, Aotrou Doue oll-halloudeg:
 ni hag on eus bet ar hras da gaoud diganeoh eur vuez nevez,
 ra vim laouen bepred gand an donezon a roit er Zakramant.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

LENNADENN GENTA.- Eur bobl izel ha dister, setu petra eo pobl Doue.
E Doue hebken e kavo an esperañs hag an diskuiz.

Lennadenn euz Levr Sofoni 2/3, 3/I2-I3

2/3. Klaskit Doue, c'hwi oll, ar re geiz euz an douar,
hag a zent ouz e hourhemennou.

Klaskit beza santel hag izel a galon,
ha marteze e vezoh espernet,
da zeiz konnar an Aotrou Doue.

3/I2. Lezel a rin er vro eur bobl izel ha dister,
hag en ano Doue eo e klaskint repu,
ar pezh a jomm euz Israel.

I3. Ar re-mañ ne gouezint mui er falloni,
ne lavarint mui a hevier,
ne vo mui en o genou a gomzou touelluz.

Bez e hellint labourad ha diskuiza heb enkrez.

SALM I45 7, 8-9a, 9 bc, I0

Meulom oll heb paouez
Doue hag e vadelez.

7. An Aotrou Doue a zalh atao d'e hér,
a rent o gwir d'an dud gwasket,
a ro bara d'ar re o deus naon,
An Aotrou a zistag ar re 'zo chadennet.

8. An Aotrou 'ro sklerijenn d'an dud dall,
an Aotrou a laka sonn ar re bleget (pe: ar re groummet)
an Aotrou a gar an dud a vuez vad,
an Aotrou 'zo divennour an dud estren.

9bc Skoazella 'ra an emzivad hag an intañvez,
ha kas a ra da netra menoziou an dud fall.

I0. Roue 'vo an Aotrou da viken,
ho Doue-c'hwi, Sion, a rumm da rumm.

EIL LENNADENN.- Warzu ar re a zo izel a galon e tevio Doue. Red eo deom eta
amzav or zempladurez, evid kaoud nerz dre ar Hrist.

Lennadenn euz lizer an abostol Sant Paol da gristenien Korint I/26-31

26. Evelse, breudeur, komprenit en doare m'oh bet galvet.

N'eus ket, en ho touez, kalz a dud gouizeg hervez ar bed,
na kalz a dud gallouduz.

27. Med ar pezh a zo diskiant er bad-mañ a zo bet dibabet gand Doue,
evid diskar an dud gouizeg;

Ar pezh a zo dinerz er bed-mañ a zo bet dibabet gand Doue,
evid diskar an dud gallouduz.

28. Ar pezh a zo a renk izel, ar pezh a zo disprizet,

a zo bet dibabet gand Doue,

Ar pezh n'eo netra, evid kas d'an netra

ar pezh a zo anezañ.

29. Evid na z'euio den d'enem fougeal dirag Doue.

30. Rag dreizañ eo emaoch e Jezuz-Krist, deuet da veza evidom,
dre hras Doue,

furnez, justis, mammenn a santelez hag a zilvidigez.

31. Evelse, hervez m'eo skrivet,

an hini a fell dezañ en em fougeal,

a lako e foug e Aotrou Doue.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Deuit oll d'am haoud, c'hwi a zo er boan

ha pounner ho samm:me ho tivehio. Alleluia !

AVIEL

Pennad euz Aviel Jezuz Krist hervez Sant Vaze. (5/I-12)

1. En amzer-se, o weled pegement a dud a oa,

Jezuz a zo pignet ouz tor ar menez;

mond a ra d'azeza hag e ziskibien a dosta outañ.

2. Kregi a ra (pe:staga ' ra) da gelenn anezo, o lavared kement-mañ:

3. "Eüruz ar re 'zo paour a galon, rag dezo eo rouantelez an neñvou.

4. Eüruz ar re 'zo leun a zouster, rag an douar prometet a hounezint.

5. Eüruz ar re o deus da ouela, rag frealzet e vezint.

6. Eüruz ar re o deus naon ha sehed euz servij Doue,

rag o gwalh a vo roet dezo.

7. Eüruz ar re 'zo trugarezuz, rag d'o zro e kavint trugarez.

8. Eüruz ar re 'zo glan a galon, rag int a welo Doue.

9. Eüruz ar re a labour evid ar peoh, rag anvet e vint bugale da Zoue.

10. Eüruz ar re o deus da houzañv ablamour da zervij Doue,

rag dezo eo rouantelez an neñvou.

- II. Eüruz oh-hwi pa daolo an dud dismegans warnoh, pa raint brezel deoh,
pa lavarint e gaou beb seurd droug eneb deoh, ablamour din-me:
- I2. Bezit laouen ha tridit gand ar joa, rag digoll kaer ho peus da gaoud
en neñvou.

PEDENNOU AR BEVARE SUL ORDINAL A

PEDENN AN DIGOR.

Grit deom , Aotrou Doue,
enori ahanoh gand oll nerz on ene,
ha kared an oll dud abalamour deoh .
Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou, +
Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.

AMEN !

WAR AR PROVOU.

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
kemer diganeom, ho servicherien,
ar provou a zigasom amañ war an aoter,
deoh da ober anezo Sakramant or Zilvidigez.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.

AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Ho pedi a reom, Aotrou Doue,
goude m'om bet maget
gand sakramant or zilvidigez: +
dre ar zikour a zigas d'an dud evid ar vuhez peurbaduz,
grit ma 'z ay ar gwir feiz atao war gresk.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.

AMEN !

LENNADENN GENTA.- Goulennet e vez diganeom pedi,med pedi en eur ober vad
en dro deom ivez,en eur sikour an nesa pa vez red.

Lennadenn euz Levr ar Profed Izaiaz.

58/7-12

7. Rannit ho para gand an hini en-eus naoñ,
roit lojeiz d'ar paourkez n'en eus ti ebed,
gwiskit ar re n'o deus netra da lakaad warno,
na droit ket kein d'an nesa
8. Neuze ho sklerijenn a darzo evel goulou uciz,
hag e teuo buhan ho nerz deoh endro.
Ho lealded a gerzo en o'raog,
ha gloar an Aotrou Doue a vo ouz ho heul.
9. Neuze,ma teu deoh golver,Doue ho responto,
ma teu deoh youhal,eñ a lavaro deoh:" Setu,me,amañ."
Ma kasit er mēz euz ho pro ar waskerez,
ar gourdrouz,ar gaou,
10. Ma roit a galon vad d'an hini en-eus naoñ,
11. ha d'an den ezommeg,hervez e hoant,
12. ho sklerijenn a baro en denvalijenn,
hag ho tenvalijenn a vo evel sked an heol da greizteiz.

SALM III

4-5,6-7,8a-9

En noz tenval ar bed
e skedo an den just.

4. Sklerijenn evid an den just,e tarz en denvalijenn,
trugarezuz,tener ha leal.
5. Eüruz an den a brest a galon vad,
hag a ren e vuhez gand onestiz.
6. An den just morse ne gouezo,
miret e vo bepred ar soñj anezañ.
7. N'en-eus aouñ ebed euz ar heleier fall,
harpa a ra e fizians war Doue.
- 8a Divrall e galon,n'en-eus aouñ 'rag netra,
brokuz eo e keñver ar paour;
E justis a zalh mad atao,
gweled a ra o kreski e hloar hag e vrud.

EIL LENNADENN.- N'eo ket war skiant ha gouiziegez an dud eo diazezet ar feiz,
med war nerz Doue hebken.

Lennadenn euz lizer kenta an abostol Sant Paol da gristenien Korint. 2/I-5

I. Va breudeur, p'oun deuet davedoh, n'oun ket deuet da rei deoh

d'anaoud mister Doue,

gand pouez komzou helavar ha gouizeh.

2. En ho touez, n'em-eus hoantet anaoud hini all ebed,

nemed Jezuz-Krist,

bet staget ouz ar groaz.

3. Disterig, aonig hag en eur grena,

oun degouezet en ho touez.

4. Va homzou, va doare da brezeg n'oa enno netra

euz prezegennoù touelluz ar houiziegez,

5. Med Spered ha nerz Doue eo a bare enno,

evid ma ve ho feiz diazezet,

nann war skiant an dud, med war nerz Doue hebken.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia ! Me eo sklerijenn ar bed.

An neb a deu d'am heul,

en dezo sklerijenn ar vuhez. Alleluia !

AVIEL

Pennad euz Aviel Jezuz-Krist hervez Sant Vaze . (5/I3-I6)

0 veza m'oa bodet e ziskibien endro d'ezañ, Jezuz a lavar d'ezo:

I3. - C'hwi a zo hollen an douar;

med ma teu an hollen da goll e vlaz,

gand petra e vo roet d'ezañ e zaour ?

N'eo mad mui da netra, nemed da veza

taolet er miz ha breset gand an treid.

I4. C'hwi a zo sklerijenn ar bed;

Eur gêr savet war lein ar menez ne hell ket beza kuzet.

I5. Ne vez enaouet eur goulou evid en lakaad

dindan eur boezell.

Lakaet e vez war eur hantolor

hag e sked neuze, evid am roio sklerijenn

d'an oll a zo en ti.

- I6. Evelse, ho sklerijenn a skedo dirag an dud
 hag o weled ar vad a rit,
 ar re-mañ a rento gloar d'ho Tad a zo en Neñv.

PEDENNOU AR BEMPVET SUL ORDINAL

PEDENN AN DIGOR.

Pedom Doue!

Aotrou Doue, dre ho madelez ha n. skuiz morse,
 ni ho ped da veilla war ho famill;
 pa n'hell ho pugale kaoud fizians nemed e sikour ho kras,
 dalhit bepred d'o diwall diouzh peb droug.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,=
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR PROVOU.

Taolit ho sellou, Aotrou Doue,
 war ar bara hag ar gwin-mañ,
 bet krouet ganeoh da genta,
 evid rei nerz d'or zempladurez:=
 plijet ganeoh ma teuint da veza evidom bremañ
 sakramant ar vuez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION.

Aotrou Doue, ho peus graet deom on lod
 euz ar memez bara hag euz ar memez kalirad,
 or zikourit, ni ho ped, da veva en doare ma vim oll
 unan hebken en Aotrou Krist,
 ha ma tougim frouez evid silvidigez ar bed,
 gand gwir levenez.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN !

LENNADENN GENTA.- Gand bolontez vad,e heller mired ar gourhemennou.

Lennadenn euz Lev'r ar Furnez,hervez Ab-Sirah. I5/I5-20

I5. M'ho peus bolontez vad,e hellit mired ar gourhemennou.

Deoh eo da zibaba chom war an hent mad.

I6. Lakaet en deus Doue dirazoh an dour hag an tan.

Astennit ho torn warzu ar pezh a gavit ar gwella.

I7. An dud a gav dirazo ar vuhez hag ar maro;

roet e vo d'ezo hini pe hini,

hervez o hoant.

I8. Doue a zo braz e furnez,

oll halloudeg eo,

ha gweled a ra peb tra.

I9. Trei a ra e zaoulagad

warzu ar re o deus doujañs evitañ,

anaoud a ra kement tra a ra an den.

20. N'en-eus roet urz da zen da veza dizakr,

na roet da zen aotre da behi.

SALM II8

I-2,4-5,I7-I8,33-34

Eüruz an neb a gerz

gand an hent eñ.

I. Eüruz ar re a gerz gant an hent eñ

hag a heuill lezenn Doue.

2. Eüruz ar re a vir e hourhemennou

hag a vez war glask anezañ a greiz kalon.

4. Roet ho peus urz hoh-unan,

ma ve miret ho kourhemennou gand aked.

5. O! ma helfen,hed va buhez,

derhel da vired anezo !

I7. Bezit mad e keñver ho servicher,

evid ma vevin ha ma virin ho komzou.

I8. Digorit din va daoulagad,

evid ma welin traou burzuduz ho lezenn.

33. Deskit din,Aotrou hent ho kourhemennou,

evid ma virin anezo beteg penn.

34. Digorit din va spered ha diskouezit din

mired ho lezenn hag he heuill a greiz kalon.

EIL LENNADENN.- Skiant an den ne za ket pell, a zo didalvez ha kleuz e kichen hini Doue.

Lennadenn euz lizer kenta an abostol Sant Paol da gristenien Korint.2/6-10

6. Va breudeur, euz Furnez eo e vez ano ganeom,

pa gomzom dirag tud deuet en o feiz.

Med n'eo ket avat euz furnez ar bed,

nag euz hini ar re a ra o mistri war ar bed,

hag a zo gouestlet da vond da goll.

7. Komz a reom, er hontrol, euz eur furnez,

misteriuz ha dalhet kuzet,

pourchaset gantañ araog ar hantvejou,

evid rei deom or hloar.

8. Eur furnez eo ha n'eo ket anavezet

gand hini e et euz mistri ar bed-mañ;

rag m'o defe anavezet anezi,

morse n'o defe staget ouz ar groaz

an Doue leun a hloar.

9. Hervez ar Skritur, ar pezh n'en-eus morse an den gwelet,

gand e zaoulagad,

na klevet gand e ziskouarn,

ar pezh n'eo ket bet diwanet en e galon,

kement-se a zo bet pourchaset gand Doue,

evid ar re o deus karantez evitañ.

10. Deom-ni eo en-eus Doue roet anezo da anaoud dre ar Spered,

rag ar Spered a wel peb tra en e greiz,

beteg donderiou Doue zoken.

SALUD D'AN AVIEL

Alleluia ! Alleluia !

Ho komzou, Aotrou Doue,

a zo evidom spered ha buhez.

Ganeoh emañ komzou ar Vuhez da bado da viken !

Alleluia !

AVIEL

Pennad euz an Aviel Jezuz Krist, hervez Sant Vaze. (5 / I7-37)

17. Jezuz a lavare:

- N'it ket da gredi, e ven deuet da ziskar al Lezenn hag ar Brofeted.

n'oun ket deuet d'o diskar,med d'o feurechui.

18. Rag e gwirionez,m'hel lavar deoh,

keit ha ma pado an neñv hag an douar,
na pig na lizerenn ne vo lammet kuit euz al lezenn,
ken na vo sevenet peb tra.

19. An neb a dorro unan euz an disterra gourhemennou,

hag a zougo ar re all da ober kement all,
a vo lakaet e-touez ar re zisterra e rouantelez an Neñv,
med an hini a heul anezo hag a zoug ar re all d'o heulia,
hennez a vo lakaet uhel e rouantelez an Neñv.

20. M'hel lavar deoh,ma n'eo ket brasoh ho justis

eged hini ar Skribed hag ar Farizianed
ne deoh ket da rouantelez an Neñv.

21. Klevet ho peus ez eus bet lavaret d'on tud koz:

" Na lazi ket,an hini a lazo
henn devezo da respont dirag al lez-varn.

22. Mad,me lavar deoh,an neb en em lakaio e kounnar

a-eneb e vreur a ielo dirag ar barner.

An hini a lavaro gwall gomzou d'e vreur

a ielo dirag ar huzul braz.

Kement hini a lavaro malloz d'e vreur

a ielo d'an tan goude e varo.

23. Pa vezi o vond da gas eur prov d'an Templ,

ma teu da zonj dit ez eus eun dra bennag etrezout hag eun all,
lez aze da brov ha red da genta d'en em gleved gantañ.

24. Goudeze,deus da rei da brov.

25. Pa 'z es d'al lez-varn gand da enebour,

hast buan en em gleved gantañ.

Bez e hell goulenñ digand ar barner lakaad krog ennout,

hag ar barner a hell taoler ahanout er prizon,

26. ha ne deui ket er maez araog beza paet ar gweneg diweza.

27. Klevet ho peus ez eus bet lavaret d'on tadou:

- Na rit ket avoultriaj,

28. med me lavar deoh:an neb a daol sellou a c'hoant war eur vaouez,

e-neus dija graet ganti ar pehed en e galon.

29. Ma ra dit da lagad dehou koueza er pehed,

tenn anezañ ha stlap anezañ pell diouzit.

Gwelloc eo dit koll eul lagad pe unan euz da izili

eged na ve kastizet

gorv en e bez epad an oll amzer.

30. Ma ra da zorn dehou dit koueza er pehed,
troh anezañ ha stlap anezañ pell diouzit.

Gwelloc eo dit koll unan euz da izili

eged na ve kastizet da gorv en e bez

epad an oll amzer.

31. Lavaret ez eus bet ivez:

- An hini a gas kuit e wreg
a dle rei dezi eur skrid a zilez .

32. Med me lavar deoh:

- An neb a gas kuit e wreg,
nemed pehet he dije gand eun all,
a boulz anezi d'an avoultriaj.

Hag an neb a zimez d'eur vaouez dilezet a zo avoultrer.

33. Klevet ho peus ez eus bet lavaret d'ho tadou:

- Ne ri ket touadennoù faoz,
gra ar pezh az peus prometet da Zoue,

34. med me lavar deoh chom heb toui e doare ebet,

35. na dre an neñv a zo tron Doue,
na dre an douar a zo skabell e dreid,
na dre Jeruzalem kêr ar roue braz.

36. Ne dou ket kenneubeud war da benn da unân ,
n'az peus ket an disterra galloud war da vleon,
da zigas anezo gwen pe zu.

37. Lavarit hebken:

- Ya,mar deo ya,
nann mar deo nann;
ar pezh a lavarer ouspenn a deu aberz an droug-spered.

PEDENNOU AR C'HWEHVET SUL ORDINAL A

PEDENN AN DIGOR.

Aotrou Doue,c'hwil hag a lavar e plij deoh
ober ho chomaj er halonou eeun ha glan,
roit deom sikour ho kras,ma hellim beza

euz ar seurd tud fidel a deurvezit beva enno.
 Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag On Aotrou, +
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll viskoaz da virviken. AMEN !

WAR AR PROVOÙ.

Plijet ganeoh, Aotrou Doue,
 ma talvezo ar brovadenn-mañ (pe: ar ~~z~~akrifiks-mañ)
 da beurwalhi on ene ha da rei deom buez nevez;
 deom-ni hag a glask heulia ho polontez,
 ra vo ive eur vammenn a veritou.
 evid ar vuez peurbaduz.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

GOUDE AR GOMUNION

Maget gand ar bevans dudiuz deut euz an neñv,
 ni ho ped, Aotrou Doue,
 da zerhel ennomp bepred
 ar hoant d'ar bevañs-se,
 a ro deom ar vuñz gwirion.
 Dre Jezuz Krist, Or Zalver. AMEN !

ON TAD

(diouz Rimsky-Korsakov)

f. *>* *mf.*

On Tad, hag a zo en nenv, ~~ha~~ ha-no be-zet san-te-let, Ho rou-an-te-lez

The first system of musical notation for 'ON TAD'. It features a treble and bass staff in G major (one sharp). The melody is in the treble staff, and the accompaniment is in the bass staff. The tempo is marked 'f.' (forte) and 'mf.' (mezzo-forte). The lyrics are written below the notes.

deu-et deomp; Ho po-lon-tez be-zet gret, var an dou-ar e-vel en nenv !

The second system of musical notation. It continues the melody and accompaniment from the first system. The lyrics are written below the notes.

Ro-it d'eomp hi-rio or ba-ra pem-de-ziek, Par-do-nit d'eom or pe-he-jou, e -

The third system of musical notation. It continues the melody and accompaniment. The lyrics are written below the notes.

mf.

vel ma par-do-nom d'ar re o deus man-ket ou-zom, Ha n'on le-zit/da goue-za en

The fourth system of musical notation. It continues the melody and accompaniment. The lyrics are written below the notes.

ff.

den-ta-dur, Met on di-wal-lit diouz an droug. A - men !

The fifth system of musical notation. It concludes the piece with a final chord. The lyrics are written below the notes.

BEZIT LAOUEN

Diskan

Unan:

Bezit laou-en, ha tridit gant ar joa

An oll RAG DIGOLL KAER HO PEUS DA GAOUT EN NEN-VOU .

1 Eüruz ar re 'zo paour a galon, rag dezo eo rouantelez an neñ-vou.

2 Eüruz ar re 'zo leun a zouster, rag an douar prometet a hounezint.

3 Eüruz ar re o deus da ouela, rag frealzet e ve-zint.

4 Eüruz ar re o deus naon ha sehet euz servij Doue, rag o gwalh a vo roet de-zo.

5 Eüruz ar re 'zo trugarezus, rag d'o zro e kavint trugarez.

6 Eüruz ar re 'zo glan a galon, rag int a welo Doue.

7 Eüruz ar re a labour evid ar peoh, rag anvet e vint bugale da Zouel.

8 Eüruz ar re o deus da houzanv ablamour da zervij Doue,

rag dezo eo rouantelez an neñ-vou.

M.Scouarnec
(An oll Zent 1971)